

Uzulier bras .

(f° 163 verso)¹

An uzulier vras deus a Pontegern
A zo gred e gadeur en ivern

An uzulier bras deus a Pontegern
A verq ar bara gant euy noten .

bis — Ag an aman gant eur reumen .
bis — da viret na roffe d'ar paour an alusen .

Pa za an uzulier d'an illis
a chach ar paour var he c'houris

Ag en ho koulen Ken truezus
euy dinerik^{er} balamour da Jesus .

na me na meus nag archant nag aour
na diner ebed da rei d'ar paour .

Mevelliou an uzulier a lavare
D'an uzulier bras euy deis a voë :

Mar Karfor'ch rei d'ar paour an alusen
Ni tremenfe bemdez eb or meren .

— Ja do Koan c'hwi a ve ingrad
A drepfe diou pe teir skudellad .
— e Kof al levini e raffen vad .

Mab ena an uzulier a lavare
D'an uzulier vras euy deis a voë :

(1). — Rien au 163 recto. — De même aux 164 et 165 rectos .

(f° 164 verso)

— Poent eo dorna ar berniou ed
Ar beorien a rank kaout o boued.

— Me ne zournin ked va berniou ed
Ken a dei seiz skoët poeselad ed.

Ken a dai seiz skoët peb boizellad
Mam mezo bio'h lez gant beb sat'hat.

Ne kredan ked ve naomegez vras
Pa na feur ar beorien ar ied glas

Pa bis
Al dibri ar pri melen var an enchou bras

An uzulier bras a lavare
Na de verelou eun deis a ve :

— na pelec'h e man va mab-hena
Da klasq eul lister d'am liana.

— Arze zo eur valin ebars ar sansail (1)
Al zo bed nao bloas o holo lin.

— Ounez a zo mad da liana
Dro da uzulierez er bed man.

Kant a pa vijent koptet
Na vorant ket evid sevel an archet.

Klask ar gelvizien^(calvez) a voa ranket
Nag evid digeri an archet.

(f° 165 verso)

Na pa voa digoret an archet
E voa ebars evel eur barbet.

A kement e goële prezant
Voa ebars evel eun aërouant.

(1).- D'abord : sansail ; l'e a été corrigé en a : S .

162

Pa za an uzulier dan douar
 E C'huiban ar skour a zio'h ar char

Ag a lavar dre ma C'huiban
 An uzulier bras a zo en tan

Pa za an uzulier er veret
 A Krene ar groas Viniget.

}

Latou boudar de Plouenan 22 8^{bre} 1852.

[rien au 166 verso.]